

**KIS-846 – Gl. principe (p. 109), référentiel (p. 111),
absorbance (p. 111), apparent / vrai (p. 113), éclat
métallique (p. 113), période d'un élément radioactif
(p. 114), accrochage (p. 114), cacophonie (p. 115),
grisaille (p. 116), modèle (d'un peintre) (p. 117)**

(YBAN, GE, LM, YBQ – 04 04–11 06 05)

PRINCIPE

[YBAN – 04 04 05] E kentelioù Fizik SADED e kaver an termenou-mañ : *pennvon, pennwirionez, lakadenn diazez, bon, pennaenn, kentaenn, pennabeg* lakaet da zamheñvelsterioù (Fiz-7/10). Kavout a reer ivez ur ger all : *gwirienn*, da skouer *gwirienn al lankadoù, gwirienn Arc'himedes, gwirienn Pascal*. E galleg ez eus da gevatalioù d'an hanc'herioù-se *principe, postulat, théorème*. Eskemmadus ar gerioù-se e galleg : da skouer e lavarer *postulats de la thermodynamique = principes de la thermodynamique ; principe de l'hydrostatique = théorème fondamental de l'hydrostatique ; principe d'Archimède = théorème d'Archimède*. An daou dermen pennañ a gaver e kentelioù Fizik SADED zo *pennvon* (da skouer : *pennvon al listri kehent, pennvon an doursavoniezh, h.a.*) ha *gwirienn* (da skouer : *gwirienn al lankadoù, gwirienn Pascal, gwirienn Arc'himedes, h.a.*).

E GBLF e rez gant *pennaenn an anniñv, pennaenn kevandalc'h ar gremm, pennaenn ar wreznerzhoniezh*.

Ha ne ve ket mat lakaat urzh ha heuliañ ar pezh a rez e GBLF ? An termenou *pennvon* ha *gwirienn* a hañval bezañ dispredet un tammig, an eil dreist holl pa ra dave d'ar wirionez, un argraf ha n'emañ ket e domani ar Fizik. Ar reizhiadoù displegañ er Fizik a denn un tammig da reizhiadoù darbenn-dezren ar Jedoniezh, war-bouez un dra : ne zarbenner ul lakadenn da wiriek, nemet dre ar c'hlotadur etre an arnod hag an holl heuliadoù tennet eus ar bennaenn, e rezh saveleñoù, reolennoù.

Sed enmoned *Dictionnaire de physique*, J.P. MATHIEU, A. KASTLER, P. FLEURY, Masson Eyrolles 1991:

“**Principe.** Hypothèse de caractère très général, servant de point de départ à une théorie ou à un exposé axiomatique et dont la validité n’est démontrée que par l’accord entre l’expérience et toutes les conséquences qu’on peut tirer du principe, sous forme de lois et de théorèmes.”

Hon diaraogerion eus SADED o deus doujet d’an disparti a zo etre ur ouezoniezh evel ar Fizik hag un diskiblezh dienevek evel ar Jedoniezh. *Pennvon* ha *gwirienn* er Fizik, *aksiomennoù* (lakadennoù) ha *delakadennoù* er Jedoniezh.

Ha ne ve ket a-walc’h gant Br. *pennaenn* er Fizik ? Penaos ober evit ul lakadenn deveret eus ur bennaenn avat, da skouer Gl. *théorème de Pascal*, *théorème du moment cinétique*, *théorème thermodynamique de Gibbs*, h.a. ? A-wechoù, e galleg, ez arverer an eil termen evit egile, e welet hon eus evit *théorème d’Archimède* = *principe d’Archimède*, ha *loi d’Archimède* zoken. Gwelet ‘m eus ivez *formule*, *relation*, *équation* e galleg ha *reolenn* / *reollun*, *daveadur*, *atalad* e brezhoneg. Gwir eo, ne ouzer ket atav pere eo ar c’hentreadoù hag an eilreadoù.

[GE – 05 04 05] A-du ganit evit eeunaat hanc’herieg poelloniell ar Fizik. Ar fizikourion o deus amprestet gerioù ar brederouriezh ha roet dezho ur ster a zeree ouzh o imbourc’hioù : *principe*, *loi*, *théorie*, h.a. Evel ma tiskouezez, eo emdroet ster fizikel an termenoù-se, tra ma emdroe diouzh e du ivez o ster prederouriel, hep kontañ an trede gennad ez eo o ster mezoniel. Kement-se oa pell a vezañ anat dimp p’hon eus savet kentelioù SADED. Setu perak e soñjan evelvoud ez eo mat *a)* koazhañ niver an termenoù, *b)* derc’hel an termenoù neptuekañ gwellañ : *pennaenn* da skouer (en ur zilezel *pennwirionez*, *pennabeg*, *pennvon*, *kentaenn*, *gwirienn*, pep hini anezho o kennotañ kealioù boudoniell, bredoniell, bedoniell, kravezel zoken n’o deus ket o flas er Fizik). Evit a sell pe deskad termenoù derc’hel eo te ar gwellañ lec’hiet evit an emell-se o vezañ ma ’z out jedoniour ha fizikour war un dro.

[Pa lavaran *termen neptuek*, e ran anv eus termenoù nad int ket re zeouezus a-fet mennozioù ur mare, a zo un trec’houllo en o steriegezh e doare ma chomint arveradus pa zedroy ar c’healioù a zougont ; *pennaenn* da skouer zo goubarek a-walc’h evit chom kevazas war ur prantad emdreiñ eus ar mennozioù kalz hiroc’h eget na ve *gwirienn* ; *principe* zoken (evel e gevatal *kentaenn*) a

ranker ambidañ dioutañ ar c'heal "kentañ" evit e arverañ en e gemeradur fizikel. A-zivout ur c'hemm lakaet er Brederoureizh etre *pennaenn* ha *kentaenn*, sl. La-11 365.]

RÉFÉRENTIEL

[YBAN – 09 05 05] Tro hon eus bet da labourat war an divoud¹. Dibabet hor boa Br. *dealf* evit Gl. *repère*. Evit a sell ar Fizik ez arverer e galleg *référentiel* pe *repère* a bep eil. Un diforc'hig a lakaer a-wechoù koulskoude : anv zo a *repère de coordonnées spatiales* hag a *référentiel*, reizhiad daveennoù, teir egorel hag unan amzerel, dreist holl evit ar c'hudennoù o tennañ d'ar geñverelezh. Sed an despizadur :

“**Référentiel.** Système de coordonnées, 3 spatiales et une temporelle, auquel sont rapportées les équations d'un problème de Physique.”

Evel a lavarez en notenn KIS usveneget ez eo diaes darbenn kinnig GP : Br. *daveeg*. Quid eus Gl. *référentiel absolu* da skouer ? Pehini eus ar c'hinnigoù roet en notenn a ve da adkemer ? Hag un dra bennak a c'haller tennañ eus *keñver* ? Diaes da 'm meno. Daoust ma 'z eus liammoù gant ar geñverelezh, pezh a ve un dra a-enep kenkoulz all. Ha hBr. *-sod* ?

[GE – 09 05 05] Gwell lezel *dave-* a-gostez (e gorvoet 'm eus e GSTL § 3545 gant ur ster pell diouzh an hini a venegez). Diaes ivez tennañ un dra bennak eus *keñver*, korvoet kalzik endeo ha dreist-holl ken skoilhus ha *dave-* pa ve lakaet ar geñverelezh e penn kont. Deurusoc'h eo hBr. *sod*, pa seller ouzh an deveradoù kembraek ha henvrezhonek anezhañ hag ivez ouzh e wrizienn boutin gant *sav*. Petra soñjez eus *hansod* ? Ar rakger *han-* a zec'her an disparti, an dibarek, ar piaouel : *hanvout* evel just, ivez *hansez*, *hanlec'h-*, h.a. Diouzh ezhomm e tennfed deveradoù anezhañ : *hansodiñ*, *hansodek*, *hansodel*, *hansodad*, h.a. Gwel ha talvout a ra evit ar Fizik...

ABSORBANCE

[YBAN – 09 05 05] Gl. *absorbance* : $A = \log(\text{diazeez } 10)(\text{read entreu / read eztreu})$, anvet ivez Br. *douester luc'hel*, Gl. *densité optique*. Ar c'heñver

¹ Sl. KIS-487 – Gl. *repère*, La-10 328-332.

read entreu / read eztreu a reer anezhañ Gl. *facteur de transmission*, eleze Br. *period treuzkas*. Merzhomp : pa vez read entreu = read eztreu ez eo A par da vann ha pa denn ar read eztreu etrezek mann e tenn A d'an anvevenn. A se ez eo A un niver adventadel o verkañ leiadur ar skinread, eleze al live lugañ. Da skouer A = 1 a verk e ranner ar read enankat dre 10 evit kaout ar read ec'hankat. Evit A = 2 ez eo rannet ar read entreu dre 100. Mechal ha pledet 'c'h eus gant ar gudenn e 'z kerriadur ar Vezekniezh... Ha degemeradus e ve *lugez* ? Pe marteze *lugrez* ?

[GE – 09 05 05] Mar intentan mat, e klaskez un anvad evit dewerzhadur logaritmek ar period treuzkas, mannel pa na vez ket leiaet ar skinread, anvevenn pa vez luget ar skin luc'h en e bezh. Un niver adventadel eo, pezh hon c'hasfe da lezel a-gostez al lostgerioù debarzhet d'ar mentadoù war-benn na zaremouezh en drevnadegezh strizh anezho, sl. La-06 43-56 : *-ded* (*rended* $U^{-1}I$), *-usted* (*reüsted* $U^{-1}IL^{-1}$), *-ogi* (*reogi* $U^{-1}IT$), *-okted* (*reokted* $U^{-1}ITL^{-1}$), *-der —el* (*reder regel* IL^{-1}). Gwell enta klask ul lostger all. O vezañ ma 'z eo kemplezh despizadur ar braster da envel, ne gaver er yezh voutin kedrann ebet en araez da vukañ war eeun d'e zec'heriadur. Dav enta ober gant un dareulad (evel ma voe graet ivez gant un darn vat eus anvadoù ar mentadoù). Fellout a ra dit disoc'h gant un hanc'her untamm ha dibab a rez al luniañ dre lostger, an hent gwellañ eo da 'm meno ivez. An daou dermen a venegez, *lugez*, *lugrez*, zo mat e-keñver sonelezh (berr hag aes da zistagañ), diforc'hell ; *lugrez* a glever hep poan evel "live lugañ" (b. enta) ; da sevel *lugez* e kentradez (pa ouzon) un arver nevez er yezh skiantel eus al lostger *-ez* (g. evel Kb. *-edd*) ha deurus bras eo. Ar gudenn a sav ne sell ket kement ouzh an arverioù tremenet (pa c'hallfed arguziñ e vez arveret al lostger *-ed* da zeverañ solwezelloù goubarel diwar an advanvioù), met ouzh an arver da zont : pe zorc'hadur ster debarzh dezhañ ? Petra eus steriegezh *lugez* a vo da zerc'hel anezhañ evit luniañ termenoù all ?

Evel just, diouzh va zu e 'm eus arnodet lostgerioù all. An hini nemetañ a 'm eus pledet gantañ eo *-vez* (g.) eus *mez* "galloud, muzul". Enep dezhañ emañ ar vezañs eus kalzig hanc'herioù lostgeriet *-vez* endeo. A-benn ar fin, *lugez* a gavan gwell. Dav avat soñjal diwar vremañ e durc'hadur ster *-ez* e sell da dermenoù hefil all.

APPARENT / VRAI

[YBAN – 11 05 05] Ur gudennig nevez, bet pleustret warni ganit endeo : Gl. *apparent* ≠ *vrai*, *propre*, *réel*. Tennet 'm eus korvo eus da studienn KIS-467² evit *loc'h manat an Heol*, *manloc'h*, *dienloc'h* ha *hañvalat* diouzh ret. Ar c'hraf zo hennezh : *absorbance apparente* ≠ *absorbance vraie*. An hini kentañ a lavarer *apparente* pa'z eo devoudet gant an amstrewiñ ha n'eo ket dre dreuzfurmidigezh gremm ar skinoù en un doare gremm all. An diskoulm zo bet kavet endeo a gav din : *lugez kewer* = *absorbance vraie* ha neuze *lugez ankewer* = *absorbance apparente*. Soñjal a ra din ez eo... ankewer an termenou *manat*, *hañvalat* evit kendeç'heriañ *apparent* en degouezh-mañ. A zo muioc'h an *Dictionnaire de Physique* (MATHIEU, KASTLER, FLEURY) a lavar "il serait désirable de réserver à l'absorption de toute origine le nom d'*atténuation* ou d'*extinction* et à la partie vraie le nom d'*absorption*".

[GE – 14 05 05] Mar komprenan, e kavez gwell na ober gant Br. *manat* a-dal da Gl. *apparent* pa vez anv a lugez, eleze pa na denn ket an diforc'h etre *absorbance vraie* hag *absorbance apparente* d'ur stadadenn eeun eus ar skiantoù, evel e tro *loc'h an heol*, met d'ur stadadenn ameeun graet diwarbouez ardivinkoù muzuliañ. E gwir, ne welan ket pe harz zo d'an astenn ster eus domani ar stadañ eeun da zomani ar stadañ ameeun : ur merzhout eo atav, azhentet dre ardivinkoù en eil tro. Kavout a ra din e ve kalz brasoc'h al lamm d'ober diwar *kewer*, adanv arveret betek henn en ur ster buhezel-divezel (GEAK en tro dre Gl. *intègre* p. 113, gant *probe* p. 187) hag en dareulerezh (*ster kewer* sl. La-09 77). Mar be un harz na welan ket ouzh arver *manat* en degouezh, e c'hallfed treiñ ouzh un daouad all a geveneboù a gaver en armerzh : *priz kriz / priz rik* hag ober gant *lugez kriz / lugez rik*... Hogen, mar heulier kinnig an *Dictionnaire de Physique*, e rafed *distav* (*atténuation*) eus ar furm vloc'hel (*manat*, *ankewer*, *kriz*, *krai*...) ha *lugañ* eus ar furm diles (*gwir*, *kewer*, *rik*...) hag a-walc'h e ve gant *lugez* hep adanv spizañ.

ÉCLAT MÉTALLIQUE

[YBAN – 11 05 05] Kavet 'm eus tu bennak Br. *tregern metal* evit ar Gl. *éclat métallique*. Iskis e kavan kement-se. Amañ e talvez Gl. *éclat* kement

² Gl. *apparence*, *apparaître*, La-10 235-242.

ha neuz ar gorre, e degouezh ar metal an disvannusted anezhañ. Diforc'hiñ a reer an doareoù **lufroù** da heul :

adamantin : naouus d'an diamant (*diamantek* ? Kv. GBAHE) ;

cireux : evel an alabastr (*koarek* ?) ;

nacré : naouus d'ar gwer kregin (*gwerkreginek* ?) ;

métallique : rizhek evit ar metaloù demer (*metalek*) ;

résineux : evel ar soufr (*rousinek, lutek* ?) ;

soyeux : naouus d'un nebeud meinadoù edanvek (*sidanek* ?) ;

vitreux : evit ar c'houarz (*gwerek* ?) ;

humide : naouus d'ar c'hriolit, dezhañ al lufur bihanañ (*delt* ?).

Muzuliañ a reer al **lufur** diwar-bouez ul luc'hventer war ur skejad a'r meinad a zo bet levnet a-gent.

[GE – 14 05 05] N'ouzon ket pelec'h ez eus bet graet gant *tregern metal* — forzh penaos, ar c'herienn-se ne oufe ergeñveriñ nemet ouzh ar sten. Da gevatal da *éclat* er ster a venegez, n'eus ket gwell eget *lufur* (a zo Kb. *lleufer* e geveleb hervez GMB 379 a ro ivez dezhañ ar c'heveleb La. *lucifer*). Ha *lufur metalek* evel just (*-ek* o verkañ an durc'hadur diouzh an ental, evel e *selloù denek ar c'hi*). A se, evel ma skrivez : *diamantek, koarek, gwerkreginek* (pe *mammerlezek, perlezek*), *rousinek, (lutek), sidanek, gwerek, delt* (*delt* kentoc'h, rak n'eo ket *delt* ar c'hriolit, met dezhañ e vez arvez un dra *delt*).

PÉRIODE D'UN ÉLÉMENT RADIOACTIF

[YBAN – 11 05 05] Lennet 'm eus tu bennak *trovezh*. Ha kewer eo en degouezh, rak n'eo ket un anadenn drovezhiek ? Anv zo a Br. *hanterhoali* kentoc'h, Gl. *demi-vie*.

ACCROCHAGE

[YBAN – 17 05 05]

“**Accrochage.** 1. Établissement d'oscillations électriques, autoentretenues dans des circuits électriques convenablement couplés. 2. Mise en rotation d'un aimant ou d'une bobine soumis à un champ magnétique tournant. Mise en rotation d'un moteur synchrone.”

Hag evel reizh, ar c'hontrol zo Gl. *décrochage*, termen arveret evit an amredoù luskellat, ar c'hefluskerioù goubred hag ar c'hirri nij, pa gollont ar c'hemporz. Kinniget ez eus bet Br. *diskregiñ*, *diskrog* evit an nijerezed. Evit an amredoù hag ar c'hefluskerioù e kinnigfen a-walc'h an un gerioù : *kregiñ* (*krog*, *krogadur*) ≠ *diskregiñ*. Kement-se a c'hoarvez pa glasker ur skinva war ur paker, er gwagennoù berr da skouer. Soñj 'm eus eus an droienn en *Asteriks* : “Krog eo ar c'hrog !” Dres, klask a reer pakañ ur skinva er gwagennoù ha santout a reer mat tre pa grog, eleze pa zeraou an amred da luskellañ. Kv. Sz. *to catch*.

(LM ha GE – 19 05 05³)

CACOPHONIE

[LM – 19 05 05] Merzhout a ran e 'm boa troet Gl. *cacophonie* dre Br. *digensoniezh* en arroud :

“D'autant que Monsieur Henri s'était mis à tirer de sa guitare des horreurs, des sons au hasard, un chaos vraiment cruel, une cacophonie qui entrainait dans l'oreille et me vrillait le tympan.”

Pelloc'h er chabistr XVII e 'm boa graet gant Br. *storlok* en arroud :

“Il disait vrai. Ces fourmis, ces verbes comme il les avait appelés, serraient, sculptaient, rongeaient, réparaient ; ils couvraient, polissaient, limaient, vissaient, sciaient ; ils buvaient, cousaient, trayaient, peignaient, croissaient. Dans une cacophonie épouvantable.”

Ar frazenn-mañ diwezhañ 'm boa troet : *er spontusañ storlok*.

Ha ne gav ket dit e terefe gwell Br. *storlok* en eil tro hag eben ?

[GE – 20 05 05] Gl. *cacophonie* n'eo ket un termen kalvezel a sonour-iez. Setu perak ez eo gwell na zanveziñ, evit luniañ e gevatal brezhonek, elfennoù an termennoù kalvezel, evel *digensoniezh*. Evel *son* zoken, da gentañ evit hepkoriñ pezh a skritellomp “enkadenn ar c'hlañvdiour” (ar c'hlañvdiour o kas ar c'hlañvour dre ar c'hlañvgarr d'ar c'hlañvdi) : re a zeveradoù diwar

³ Eskemmoù e sigur an droidigezh emañ Laorañs MOTROT oc'h ober eus levr Erik ORSENNA : *La grammaire est une chanson douce*.

son emeur en arvar da gaout e hanc'herieg ar sonouriezh. An dizarbenn-mañ hon lak da dremen hebiou da luniadoù prometus evel *sondrailh, sondrast, sonfreuz, sondroz, tarson...*

Daou hent all a c'haller arnodiñ :

~ arbennikaat un termen eus ar yezh voutin, evel ma kinnigez ober gant *storlok*, a c'hallfed klask ober ivez gant *bioc'henn, bourbl, chalamai, karbac'h, tabac'h, talabao, strak, strap, toumpi*, h.a.

~ deverañ diwar ur stirann all ; soñjal a ran e *klev* : pe *a*) dre grennañ ur bomm : *un euzh e glevout* → *euzhklev*, *azgas e glevout* → *azgasklev*, *hiris e glevout* → *hirisklev*, *un touez/touesk e glevout* → *touesklev* ; pe *b*) dre rakgeriañ : *targlev, mesklev, tarazklev* (e hemañ, ar rakger *-az-* ouzhpennet evit ar gwered sonel dreist-holl), h.a.

(YBQ, YBAN, GE – 20-27 05 05)

GRISAILLE

[YBQ – 20 05 05] Klasket 'm eus treiñ Gl. *grisaille*. Kalvezerezh livouriezh eo. Arveret e'm eus Br. *glaswenn* diwar VALLÉE dre faziañ peogwir e ro *glas-wenn*, Br. *glaswenn* o vezañ Gl. *grisâtre*. GC a ginnig *azlouet*. Un daolenn e *glas-wenn* pe un daolenn en *azlouet*. Hag e klot gant ur c'halvezerezh ?

[YBAN – 21 05 05] Gl. *grisaille* a ve hervez DCFB. Br. *louetlivadur*. Evel just e c'hoari ar gwered klañvdi : “*livañ ul louetlivadur*”. Koulskoude hon eus endeo Br. *dourlivañ, mellivañ, eoullivañ, pastezlivañ*, ha n'eus diaester ebet o hepkoriñ seurt gwered. Ar *grisaille* zo un doare Gl. *camaïeu*. Sz. *monochrome painting*. Ur skouer all : Gl. *un camaïeu de bleu*, Sz. *a monochrome in blue*. A-dal da Gl. *grisaille* emañ Sz. *grisaille* ivez, gant troiennoù all diouzh an degouezh : Gl. *une marine en grisaille*, Sz. *a seascape in shades of grey*. An alamaneg a lavar ivez *monochrome Malerei* a-dal da Gl. *camaïeu*. Doareoù all zo gant an alamaneg : Gl. *en camaïeu*, Al. *Ton in Ton (gehalten)*, Gl. *en camaïeu bleu*, Al. *Blau in Blau (gehalten)*, *in Tönen (gehalten)*. Evit ar c'hembraeg a ra gant *unlliw, llun unlliw*.

Kinnig a ran Br. *unlivañ*, Gl. *camaiëu*, ha da heul Br. *un unlivadur e louet pe ul louetlivadur*, Gl. *grisaille*.

[GE – 27 05 05] A-zivout Gl. *grisaille*, en arverioù kalvezel ar ger el Livouriezh, eo diaes pourchas ur c’hevatal brezhonek hep bezañ graet da gentañ ur gelc’hstudi war an diskiblezh ha war he hanc’herieg. Evit an arverioù pemdeziek ha lennegel, dareulat, n’eur ket endalc’het da amprestañ an dareulad gallek. Ur rakger o revout dibaot, a ’c’h eus te arveret en Armerzhouriezh ha me er Mediaoù eo *il-*. An durc’hadur ster a roan dezhañ en *ilrez* a c’hallfe bezañ adkemeret marteze evit ar c’hevatal da Gl. *grisaille* er c’hemeradur kalvezel : *illouet, illoued-* ? Diwallomp avat a gouezhañ er c’halficherezh amzesk. P’hon eus savet termenoù evit an Armerzhouriezh, ar Jedoniezh, ar Bredelfennerezh, ar Jederezh, ar Stlenneg, h.a., hon eus kemeret ar boan da c’hounit da gentañ un anaoudegezh vat eus pep danvez. An hent nemetañ eo. Diwall a ran diouzh ar skrivagnerion a zo evito ar gerioù gerioù ha netra ken, dreist-holl pa na glaskont ket dieubiñ o spered diouzh moul ar galleg ha da gentañ dre ur studi a-zevri eus ar brezhoneg. Ne ouzont nemet astenn dimp gerioù gallek en ur c’houleñ libistrañ warno ur gwiskad liv brezhonek.

(YBAN ha GE – 27 05–11 06 05)

MODÈLE (D’UN PEINTRE, h.a.)

[GE – 27 05 05] Gl. *modèle* (ul livour) : Br. *gouzelv* ? Hag ar ger ne ve ket bet tennet dre dreallañ diwar *gouzelviñ* (Gl. *modeler*)⁴ ? Daoust ma anad ennañ ur c’hevenebadur furlmel *gouzelv ÷ goustur* en en kavan diaes da zegemerout. Perak ne gemerer ket *patrom* na mui na lei ?

[YBAN – 30 05 05] Evit Br. *gouzelv* a zo bet arveret en *Aber 2 38* er pennad *Penaos e voe salvet Wang-Fô*. Sed ar frazenn :

“Den yaouank ebet eus ar mare ne oa diwerc’hel a-walc’h da dalvout dezhañ da *c’houzelv*, hogen Ling a lakaas e wreg he unan da bozañ dindan brunenn al liorzh.”

⁴ Sl. GEME. 142, GEKBB. 99.

A se n'ouzon ket mui piv en deus kinniget an termen-se. Moarvat eo bet degaset da gentañ, a-raok Br. *gouzelvad*, Gl. *modelé* (GEME), pezh a c'hou-laka ur verb *gouzelviñ* (kv. GEKBB).

[GE – 31 05 05] Evit a sell *gouzelv-* a 'm boa e arnodet e 1993 da geñver ur c'hask a raen war deveradoù ar rakger *gou-* en e zure'hadur ster "lakaat un ober, un X war"⁵.

[YBAN – 06 06 05] Adlennet 'm eus KIS-441 a-zivout ar rakger *gou-* : "lakaat X war", evel *gouzalc'h* "lakaat an dalc'h war", *gougantañ* "lakaat, astenn ar c'hant war", *gougevaniñ* "astenn kant ar gevanenn war", *goudaviñ* "lakaat tav war", ha *gouzerc'hañ* "lakaat derc'h war". Ar gudenn eo gouzout hag emañ *goustur* ivez er goulun-se, — ha *goulun* ivez a du 'rall. Marteze eo bet kinniget *gouzelv* ganin (?) gant ar ster Gl. *modèle*. Daoust pe zaoust, klaskomp diansavelañ ar perag. An termen kinniget ganit *goustur* a veizan evel henn : "*sturiet* eo al livour a-zindan gant ar patrom, emañ ar pezh evel *stur* a-zindan". Diaes eo lavarout "astenn ar *stur* war", nemet e ve dav gwelout aze un eilpennadur eus an diarsell, evel a c'hoarvez alies a du 'rall : eus "ub. o lakaat kant an X war udb." da "bezañ lakaet kant X war ub. gant udb.= ub. (pe udb.) o vezañ dindan kant udb. (ub.)". Adkavout a reer ivez unan eus durc'hadurioù ster *gou-* : a-zindan, tamm pe damm... Heñvel dra : "*goulun* an argerzh = luniet eo an argerzh a-zindan, tamm pe damm". Ha n'eo ket se a zisplegez — a c'houzisphegez — e KIS-513⁶ a-zivout *goustreud* evit lec'h al *logistique* ? Evit *goulev* (*gou-* + *lev(iañ)*), sl. KIS-387⁷, a veizan en hevelep doare. Mar savan ur goulev evit sevel ur geriadur e talvez e vo leviet savidigezh kalvezel ar geriadur gant an kez goulev : "goulev savidigezh ar geriadur = leviet eo ar savidigezh a-zindan gant un heuliad arc'hadou". Menegomp ivez KIS-401 : "E-barzh sterva an daou dermen Br. *goulun*, *goulev* e vo kavet an termenou Gl. *schéma*, *schème*, *modèle*, *structure*, *ensemble structurel*, *configuration*, *forme (spatiale, temporelle)*, *gestalt*, *pattern*, h.a., hep komz eus *programme* e ster ar Stlenneg."⁸

⁵ KIS-441 – Gl. **façonner**, La-10 153-154.

⁶ KIS-513 – Gl. **logistique**, **intendance**, La-11 27-30.

⁷ KIS-387 – Gl. **régulation**, La-09 322-323.

⁸ KIS-401 – Gl. **schéma**, **schème**, La-09 393-397 (p. 397).

Ha neuze, quid a-zivout Gl. *le modèle d'un peintre* — a zo un dareulad evit *le modèle d'une peinture faite par un peintre* ? “H. zo *gouzelv* livadur ur poltred = delvet (furmet) eo al livadur a-zindan gant H.” Menegomp ivez an hBr. *condeluu-* /kondhelw/ “modèle” (DOB), “exemple”, *condelu* “apparence exemplaire” (VBEG, § 177) a ve bremañ *kenzerv*, nemet e ve arveret *kent + delv = kentelv*. Ne gaver ket *kent + d- = kenz-*, diouzh a ouzon, tra ma ’z eus *cynddelw* e kembraeg.

Ha *gouzelviñ* ? Da c’houzelv e c’haller arverañ ivez ur patrom pri pe vaen — un delwenn ! — ha neuze *gouzelviñ* zo sevel seurt patromennoù. Arabat disoñjal ez eo ar *modèle*, ar *gouzelv* kig ha gwad, un danzeadur, un dec’h. Pa boz ur vaouez en noazh dirak ur saliad skolidi n’eo ket e rezh un hinienn en he fersonded, met e rezh un tamm pri molumet, un delwenn c’houzelvet gant... Doue, lakaomp, an *delwad* eme Gembreiz, ar Gouzelvour, neket ?

[GE – 07 06 05] Dre venegiñ *goudaviñ*, *gouzerc’hañ*, h.a. e venegan un durc’hadur ster eus *gou-* a-douez durc’hadurioù ster all. Da bep rakger e vez ur skalfad durc’hadurioù ster, hep bevennoù spis, a-gevarlank tamm pe damm hag o fiñval gant donedigezh an deveradoù nevez. Pezh a ’m diaez eo ar skar re vras a ve etre an daou zurc’hadur a lakfed da c’hoari e *gouzelviñ* "molumiñ" hag e *gouzelv* "patrom". Anglevout a rafen kentoc’h (un anglevad n’eo ken, gant gwanded ha kreñved an anglevadoù, gwanded pa zianavezont ar poellata, kreñved pa ’z int an doare en deus ar yezher da anlouerañ e yezh) *gouzelviñ* ha *gouzelv* (g.) er c’heñver m’emañ *stummañ* ha *stumm*, *furmiñ* ha *firm*, *gouluniañ* ha *goulun*, h.a. Ne welan ket pe dermen gallek a zo o klotañ en degouezh, mard eus unan — eleze an termen goubarel hollek o klotañ gant an termen louerele dibarek *modelé* (*gouzelvad*); *skiant ar gouzelv*, *arz ar gouzelviñ*... Moarvat ne oar ar galleg nemet ober gant *modelé* e pep hini eus an tri c’hemeradur.

Pa zegasez hBr. *condeluu*, e ve tu d’e gorvoiñ. Met ned afen ket dre an hent kevanel evit e zezneuziañ; an hent kedrannel, ouzhpenn ma rafe hepkoriñ ar furm soniadel divoas *kenz-*, a zisoc’hfe gant un deverad bev : *kendelv-* (sl. an arroud eus KIS-221 a-zivout dezneuziadur hBr. *annedmol*⁹). Da c’houzout avat ha *kendelv* ned eo ket endeo re garget e steriegezh dre berzh e

⁹ KIS-221 — Kemmadurioù g-, La-08 30-38 (p. 34).

zeveradoù *kendelvek*, *kendelviñ*, h.a. Gant arver kentañ *kendelv* en *Emsav 57*¹⁰ e tigure an hent o kas d'an termenou *kendelvek*, *kendelvegezh* h.a. ar Jedoniezh hag ar Stlenneg, oc'h enderc'hel enta keal ur c'hemplegañ, un destrizh a virfe a-walc'h a zegas an termen e lavar an arz.

E adlavarout a ran avat, ne welan arguzenn soliet ebet enep arverañ Br. *patrom* evel kevatal da Gl. *modèle* (*de peintre*, h.a.). Hogen lakaomp, reñver n'eo ket euver : ar ginnigadenn a rez, *kentelv* b. (-nt + d- → -nt- evel e *kantalc'h*, *kantezv*) zo meur a emsav ganti : da gentañ ez eo gwerc'h a bep arver pa ouzon ; he c'hompren a c'haller evel an delv deroù, an arzour o loc'hañ diwarni hervez e hentoù dezhañ.

CÉZANNE a lavare bepred : “*aller sur le motif*”. Ma n'eo ket eñ en deus krouet an droienn, ac'hoel eñ eo a roas dezhi ur c'hemeradur nevez a arloezas hentoù an arz en 20t kantved. Neuz an traoù a baoueze a vezañ ar *patrom* da zrevezañ evit bezañ ar *motif*, ar *goustur*¹¹, ar *goulusk*, pezh hon eus graet anezhañ ar *bonveziad* — gant ur c'hemmig ster evelkent, hemañ : ar *goustur ma 'z ae CÉZANNE warnañ* bep beure oa un danvez bonveziad a zeue da vonveziad da vat pa eskore un oberenn diwarnañ (hervez an doazhadelloù : “an avel a c'hwezh e-lec'h ma kar” pe “an den n'eo ket mestr war an nit nag an nit mestr war an den”).

[YBAN – 11 06 05] A-du gant da evezhiadennoù a-zivout *gouzelv* ha *gouzelviñ*. Laouen an holl gant Br. *kentelv* evit kendeç'heriañ Gl. *modèle*, dreist holl o c'houzout e teu eus hBr. *condelu* « *apparence exemplaire* ».

¹⁰ “He izili [d'ar gevredigezh kentañ] zo enni dre berzh un dargouezh, o ganedigezh. Ha padal ne vezont aotreet da vont enni nemet a gement ma vezint heñvel ouzh ur *gendelv*, dispis evit gwir ha valigant, hogen diarc'het groñs. Ret eo d'an den bout *kendelvat* e pep keñver, kevazas diouzh ar *gendelv*” (*Emsav 57* 295, Gwengolo 1971).

¹¹ Anaout a reer al lies arver a gav an termen “natur” e prezeg al livourion ; da skouer CÉZANNE : “Approcher lentement, humblement jusqu'au plus secret de la nature.” Ken ez eus un enepster o respizañ an arz diarluniek evel an arz o trevezañ an natur. A se e kavan dikoc'h komz eus “lunioù eus ar bed” (La-06 95) pe eus “neuz an traoù”. Sl. KIS-319 – Gl. **rendre**, La-08 255-260 (p. 259) ; sl. ivez KIS-280 – Gl. **site**, La-08 142-151.